

76

Ar C'honscri yaouanq.

(426)

Var ton : C'était un conscrit d'Corbeil.

Deut da zelou va c'hlemon
 Ha va huanadennou,
 Rac n'eq deo get hep rëson,
 Nan, hep rëson, nan, hep rëson;
 Rac n'eq deo get hep rëson
 Eo glac'haret va c'halon.

Me a voa em plijadur
 Er bourg demeus a Blifur,
 Pa glëvis aq tabourin,
 An tabourin, aq tabourin;
 Pa glëvis aq tabourin
 A ras din calz a chagrin.

Eno voe quelet neuze
 All gonscriet ar c'hontre
 O tont da denna ar billet, (427)
 Tenna 'r billet, tenna 'r billet;
 O tont da denna 'r billet
 Erit beza soudardet.

Pa laqis eq toc va dorn,
 Me ne voaq na dall, na born,
 Rac quelet a ris diouc'h-tu,
 Diouc'h-tu, diouc'h-tu, diouc'h-tu, diouc'h-tu;
 Rac quelet a ris diouc'h-tu
 Em boa bet ar billet du.

Me yas da laret d'am mam:
 An dro-mu eo va beg cam,
 Rac tennet meus numero tri,

Numero tri, numero tri;
 Rac tennet meus numero tri,
 Hac e meus un troatad fri.

Mar teu va douq d'am goulen,
 Lavarit dezji souden:
 Yannic qez, da amourous coant,
 D'amourous coant, d'amourous coant; (428)
 Yannic qez, da amourous coant,
 A ranq mont d'ar regimant.

Ha possubl ve d'am Yannic
 Dont da quittat e zouciq!
 Bigen n'ellin sur anes-än,
 Sur anes-än, sur anes-än;
 Bigen n'ellin sur anes-än
 Coant nep plijadur bremañ.

Tao!... na c'hlaouren get, Mari;
 Torch da veg ha c'hoez da fri...
 Mir atao din mad da galon,
 Mad da galon, mad da galon;
 Mir atao din mad da galon,
 Pa deuin a c'harmizon.

Ofen a vo, va doucic coant:
 Mont a ran d'am regimant;
 Eno me rei sur va dever,
 Sur va dever, sur va dever;
 Eno me rei sur va dever,
 Da c'hortoz distrei d'ar quër. (429)

N'am ancounac'ha bigen,
 Rac mervel a raen soudem:
 Ro din ur poqic stard, va douç!
 Va douç, va douç, va douç, va douç;
 Ro din ur poqic stard, va douç;
 Te vo atao va amourous.

Adieu ta, tud va farves,
 Ha te va mignonez qez;
 Adieu, va zad, adieu, va mam,
 Va zad, va mam, va zad, va mam;
 Adieu, va zad, adieu, va mam,
 Laqit fin d'hoc'h oll estlam.

Mont a ran diouc'h-tu en rout,
 Rac ret mad eo dec'h gouzout
 Penos hor vaillant general,
 Hor general, hor general;
 Penos hor vaillant general
 En deus c'hoant d'am c'haout ractal.

(430) Loude difen va mam-bro,
 En ho touez me zistrozo;
 Ha neuze, me en assur,
 Me en assur, me en assur;
 Ha neuze, me en assur,
 E vimp oll en plijadur.

Pa vin en eur garnizon,
 Bez tranquil var da vignon,
 Rac did e vin bepret fidel,
 Bepret fidel, bepret fidel;
 Rac did e vin bepret fidel,
 Va doucic coant ha va el.

Ha mar class bigen plac'h coant

Va c'hanjoli en instant,
 Parleflañ deo, parleflañ clei,
 Parleflañ deo, parleflañ clei;
 Parleflañ deo, parleflañ clei
 A rin-me sur bepret dei.

(431) Rentet ebars em parres,
 O pourmen gant va mestrez,
 Diouzomp an oll a sello,
 Oll a sello, oll a sello;
 Diouzomp an oll a sello,
 Ha gant joa a lavars:

Arca, na brava daou den!
 Ni a vezo calz laouen
 Ouz o quelet o temerzi,
 O temerzi, o temerzi;
 Ouz o quelet o temerzi,
 Hac o chom en hon touez-ni.

M'ho trugare, mignonet;
 Demeurs e vo va heuret;
 Rac-se deut oll d'an ebat,
 Oll d'an ebat, oll d'an ebat;
 Rac-se deut oll d'an ebat,
 Ni ho ped a galon vad.

(432) Adieu, mont a ran em hent,
 Rac, m'en assur, e zec'hoent.
 Graç demp un deiz d'en em velet,
 D'en em velet, d'en em velet;
 Graç demp un deiz d'en em velet:
 Qen a vo, va mignonet.

A. Lédan.